

Dir-na-dor (dorr) :Yves Charles Marie (Koadoud 1874
- Koadoud 1957)

E-barz al leor "Bleuniou Breiz-Izel", bet embannet e
1902.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Taolenn

Bered ar barrez.

Mouez chiminal an ti kouezet.

Ar pistiklaou hag ar gweneried.

Bered ar barrez

E-touez an oll parkou labour,
Eur park a zo da ziskuizañ ;
Hennez a vez 'n harz troad an tour,
Tro-dro d'an iliz peurvuiañ.

Eno, an irvi a vez toullet,
Ne zav enne freuz¹ nag edo'²,
Mez kroaziou du ha drouglivet,
War bep hini stag eun ano.

Hemañ a zo eur parkad tud,
Eur parkad tud a zo kousket,
Da hortoz trompill ar burzud
A vo gand an êlez sonet.

Evel tohadou bet falhet,
Ez int astennet en douar :
An had er grignol 'zo savet,
Ar plouzou 'zo chomet war var.

Hemañ eo park al labourer :
Ar park 'teuont oll da repoz
Pa o-devez 'pad pell amzer,
Kastizet o horv, deiz ha noz.

Amañ ne gouez na riou na tommder,
Poan ebed ken, na hañv na goañv ;
An douar, gwechall kden pounner
A zo bremañ de³ flour ha skañv.

Gweel diwezañ, bet aozet
'Baoe pell amzer gand o zadou,
Evel gand pluñv eo flourraet
Dre al ludu deuz o horvou.

Amañ 'teuont, gwir gristenien,
'Tal-kichenn an iliz, o mamm,
Ma savo c'hoaz mouez o fedenn
Bep beure da skañvaad o zamm.

Gwechall, bep sul e tiskuizent
War he zro, kichenn-ha-kichenn,
Hirie 'tiskuizont evel kent,
Er zulvez a bad da viken.

¹ freuz : frouez.

² edo' : edou.

³ de : deze.

Mouez chiminal an ti kouezet

Me 'oe chiminal eur hoz ti,
Savet gand koz vein ha koz pri.
Nan on⁴ nag uhel na ledan ;
Anzav a ran heb aon na mez,
Aliesoh 'm-esu santet c'hwez
A bato⁵, kig-sall ha krampouez
Evid a gog rost hag amann.

Kouslkoude gwechall, da goulz noz,
An oll dorjous serret kloz,
Troid en oaled ha penn en êr,
Me a lare da bep unan :
« Amañ 'zo⁶ tud, amañ 'zo tan,
Ha 'vid pep kristen degemer. »

Nag a baour-kêz am-eus tommet,
Dindan ma mantell vogedet,
E-pad nozveziou skorn ar goañv,
Ha ped ha ped a wennili
'Zo deut da houl' neizañ ganin,
D'an nevez-amzer ha d'an hañv.

Kontadennoù ha sonioù koant,
Am-eus klevet ivez dre gant,
Pa oa Fañch an Ti-All o ren,
Beb noz, en korn ar fornigell,
Gand e gorn berr hag e skudell,
War horre ar chipot-holen⁷.

An noziou-ze, an dud dilerh⁸,
Deuz ma fenn goloet a erh,
'Wele fulennoù o strinkañ.
Ha furm teuzioù ha lutuned,
O nijal e-touez ma moged,
Da lakaad ane'⁹ da spontañ.

Gwelet 'm-eus stagañ 'n drezenn-bod,
Gwelet 'm-eus devi meur a skod,
Da Nedeleg gand kalz a fe',
Tra ma tremene peb rumm tud
O buhez amañ, kuit a vrud,
'Vel moged o sevel en neñv.

Eur zoñj eo kement-se bremañ :

⁴ Nan on : stumm naha e tregerieg. N'on

⁵ A bato : a batatez, a avalou-douar.

⁶ 'zo : tregerieg : Amañ ez eus tud, ... tan.

⁷ ar chipot-holen : amañ : ar bank leh ma vez lakaet an holen.

⁸ an dud dilerh : an dud a zo diwezad evid mond d'ar gêr.

⁹ ane' : aneze.

Na ton na zon mui ne glevan,
An ti koz paour a zo deut mud,
Beteg ar skrill a zo tavet,
Maro gand riou e korn an oaled,
Ha me ne glevan ken kammed,
Nemed mouez kriz an avel-yud.

Ar pistiklaou¹⁰ hag ar gweneried¹¹

Eun devez, eul lapous bihan,
Eur pistiklaou euz ar vro-mañ,
En em gavas souezet-braz,
(Nebedu a oad e-nevoa c'hoaz)
O weled o tond 'barz ar vro
Eur bagad evned dizano :
« Mamm, emezañ, piou ar re-ze,
Gwenn dre zindan, du war horre,
A zo du-hont war lein an ti
O kanañ hag oh ebati ? »
An hini goz a respontas :
« 'Re-ze 'zo tud a wrienn vraz¹²,
Gweneried, tud en o eaz¹³,
A zeu 'pad an hañv war ar meaz¹⁴,
Hag a dremen ar goañv en kêr,
Pell ahann, 'n eur vro domm ha kaer. »
« Mond a refom gante on-daou,
Mamm-goz ? », eme ar pistaklou.
« Ma mabig, diwallit ervad
Na deufeh biken d'am huitaad !
Pe ne ve yen, pe ne ve tomm,
Pep hini 'n e neiz a gle chom ! »
Koulskoude ar lapous bihan
Euz ar respont ne reas van ;
Aliez e-leh labourad
War e neizig 'barz ar bern-koad,
'Chome 'vel eun evn souezet
Da zelled ouz ar gweneried,
O soñjal, digor e henou :
"Na me 'garje bezañ aotrou,
Evid galloud prim-prim nijal,
Ober ma neiz er chiminal
Ha moned en kêr 'pad ar goañv
'Leh chom 'mesk ar plouz da sklornañ ! »
Ar vamm-goz paour, o weled se,
A brezege dezañ bemde',
Med kaer he-doa, he fistiklaou
Ne deurveze mui he selaou.
Chom 'reas an treo¹⁵ evel-se
Beteg eun devez d'ar beure,
M'oa klevet eur gweneri koz
O lared : « Hirie, a-raog noz,
Bugale, e vo red skampañ,
Rag hebdale e teuy ar goañv.

¹⁰ Ar pistiklaou : ar pennglaou.

¹¹ ar gweneried ; ar gwenniliied.

¹² tud a wrienn vraz : tud a ouenn vraz, noblañsou.

¹³ eaz : êz (leoneg, evid ar rim).

¹⁴ ar meaz : ar mêz (leoneg)

¹⁵ an treo : an traou (tregerieg).

Pa larin : kuik ! 'teufet raktal,
Oll en berr war ar chiminal ! »
Ar pistiklaou a oa laouen :
« Echu, 'mezañ, ma finijenn ! »
Ha da zerr-noz, pa glevas "kuik !",
Hag eñ 'mêz e neiz... Ar paourig !

Eur beure deuz a viz Genver,
Teñval an neñv, yen an amzer,
Eur pistiklaou 'oa o ouelañ,
Hag e dreid skornet didannañ,
War lein eun ti e-barz 'n eur gêr,
Kollet e hent pell deuz ar gêr,
« Siwaz ! 'mezañ, n'hallan mond ken,
Ma askell skuiz, ma halon yen,
El leh-mañ 'vo red din mervel !...
Kenavo ! ma bro Breiz-Izel !
Kenavo ! ma mamm-bistiklaou,
Ha n'am-oa ket prizet selaou ! »

« Siwaz ! ma vijen-me bet fur,
'Vijen ket amañ a-dra-zur !...
O ! bernig plouz, o ! berniou foenn,
'Leh 'vijer ken tomm treid ha penn ! »

« O ! du-hont en Breiz, ma neiz kloz,
Bet savet gand ma zadou koz !... »

Skuillañ a ra eun nebeud daero',
Hag ar pistiklaou 'zo maro,
Ruillal a ra diwar lein an ti
E gorv d'ar hizier da zebri.

Kelennadurez

Pe ne ve yen, pe ne ve tomm,
Pep hini 'n e neiz a gle chom.